



# Skoazell & Desk 2016 2017

Les aides de la  
Région Bretagne pour  
devenir enseignant-e bilingue  
breton/français ou travailler  
dans les métiers bilingues  
de la petite enfance



“**DESK**” et “**SKOAZELL**” sont des aides individuelles aux personnes qui ont le projet professionnel de devenir enseignant·e bilingue français-breton ou enseignant·e de breton, ou d’exercer en breton un métier de la petite enfance.

Ces dispositifs sont mis en place dans le cadre des actions de la politique linguistique du Conseil régional en faveur de la transmission de la langue bretonne.

## QUELS OBJECTIFS ?

- › Former un nombre conséquent de personnes qui soient en capacité d’enseigner la langue bretonne et en langue bretonne dans le système scolaire ainsi que de travailler en breton dans le monde de la petite enfance pour permettre la transmission.
- › Assurer un nombre adéquat de candidat·e·s aux postes d’enseignement, afin de permettre la continuité du développement des trois filières d’enseignement bilingue.

---

## DESK

### POUR QUI ?

→ Vous voulez apprendre le breton ou perfectionner votre connaissance de la langue **afin de devenir enseignant·e bilingue ou enseignant·e de breton** : vous pouvez bénéficier de « **DESK / ENSEIGNEMENT** ».

Cette aide s’adresse :

- aux enseignant·e·s monolingues ayant obtenu un congé-formation de leur employeur pour devenir enseignant·e·s bilingues/enseignant·e·s de breton ;
- aux titulaires d’une licence ou de toute autre équivalence permettant de s’inscrire à la préparation aux concours de l’enseignement bilingue, ou aux titulaires d’un diplôme supérieur permettant de s’inscrire aux concours, et qui souhaitent auparavant apprendre la langue bretonne ;

- aux enseignant·e·s bilingues qui souhaitent suivre une formation supérieure de 3 mois en langue bretonne afin de perfectionner leur maîtrise de la langue.

→ Vous voulez apprendre le breton ou perfectionner votre connaissance de la langue **afin de travailler dans les métiers bilingues de la petite enfance** (auxiliaire de puériculture, agent·e spécialisé·e des écoles maternelles, assistant·e maternel·le, assistant·e parental·e, éducateur·rice de jeunes enfants, puériculteur·rice...) : vous pouvez bénéficier de « **DESK / PETITE ENFANCE** ».

Cette aide s’adresse :

- aux personnels monolingues de la petite enfance déjà en fonction ayant obtenu un congé-formation de leur employeur pour devenir personnels bilingues de la petite enfance ;



- aux personnes déjà titulaires d'un diplôme ou concours ouvrant à un des métiers de la petite enfance et qui souhaitent apprendre la langue bretonne préalablement à leur recherche d'emploi ;
- aux personnes en reconversion professionnelle et relevant de la formation continue qui ont pour projet d'apprendre la langue bretonne préalablement à l'entrée dans une formation préparant à un métier de la petite enfance.

## **CONDITIONS DE RECEVABILITÉ**

Il est possible de bénéficier de « Desk / enseignement » pendant l'année de formation au breton puis de « Skoazell » pendant les deux années de master enseignement bilingue.

L'aide au titre de « Desk » ne peut être cumulée avec un autre financement de la Région, à l'exception de l'aide au financement de la place de stage pour les demandeur-euse-s d'emploi et/ou de l'aide au titre de la rémunération des stagiaires, selon les critères d'éligibilité définis dans le Cahier des clauses techniques particulières du Programme Bretagne Formation 2015-2017 (s'adresser au Service des parcours d'accès à la qualification : [spaq@bretagne.bzh](mailto:spaq@bretagne.bzh) / 02 99 27 14 70).

Pour bénéficier de l'aide, vous devez être inscrit-e à une formation intensive en langue bretonne de 6 mois ou plus dans l'un des centres de formation agréés :

- Kelenn (année de préformation) ;
- Mervent ;
- Roudour ;
- Skol an Emsav ;
- Stumdi ;
- UCO (Guingamp ou Arradon – DU) ;  
ou à une formation intensive en langue bretonne de 3 mois dans l'un de centres de formation agréés :
- Mervent ;
- Roudour ;
- Skol an Emsav ;
- Stumdi.

Le dossier « Desk » doit être complet et impérativement adressé avant les dates limites mentionnées ci-après (voir « Dépôt du dossier »).  
**Tout dossier adressé après ces dates ne pourra être traité.**

## QUELLES MODALITÉS ?

### FINANCEMENT

« Desk » est un dispositif partenarial entre la Région Bretagne et les Départements du Finistère et du Morbihan. La pré-instruction des dossiers est confiée à l'Office public de la langue bretonne.

Le montant de l'aide est de 3 000 euros pour les formations longues (6 mois). L'aide de la Région représente le différentiel entre le montant maximal (3 000 euros) et l'aide apportée par le Département de résidence du ou de la bénéficiaire. Si le Département concerné n'apporte pas d'aide, la participation de la Région est plafonnée à 2 500 euros.

Le paiement de l'aide se fait en deux versements en cas d'aide conjointe du Département et de la Région, ou en un versement pour le cas où seule la Région intervient.

L'aide est de 1 500 euros pour la formation supérieure (3 mois).

Les deux aides sont cumulables en cas de stage de 6 + 3 mois.

En 2016, le nombre d'aides accordées ne pourra excéder :

- 65 pour les formations « Desk / enseignement » de 6 mois ;
- 26 pour les formations « Desk / enseignement » de 3 mois ;
- 21 pour les formations « Desk / petite enfance » de 6 mois ;
- 9 pour les formations « Desk / petite enfance » de 3 mois.

### L'ENGAGEMENT DES BÉNÉFICIAIRES

En contrepartie de l'aide, vous vous engagez à passer obligatoirement l'examen du DCL (Diplôme de compétence en langue) à l'issue de votre formation et à tout mettre en œuvre pour :

- devenir enseignant-e bilingue dans une des trois filières d'enseignement bilingue ou immersif si vous êtes bénéficiaire de « Desk / enseignement ». Les enseignant-e-s monolingues habilité-e-s à l'enseignement bilingue à l'issue de leur formation s'engagent à tout mettre en œuvre pour enseigner pendant 5 ans au moins dans une classe bilingue français-breton ;
- exercer un métier de la petite enfance en langue bretonne si vous êtes bénéficiaire de « Desk / petite enfance ».

#### **MODALITÉ DE CONTRÔLE**

En cas de rupture de son engagement, le ou la bénéficiaire de « Desk » devra rembourser l'aide allouée. Ces dispositions sont détaillées dans la convention d'engagement du ou de la bénéficiaire.

### CONSTITUTION DU DOSSIER

Votre dossier de candidature comprendra :

- la fiche de renseignement complétée ;
- la lettre d'intention dûment signée ;
- votre CV ;
- la copie de votre certificat d'inscription dans l'un des établissements de formation ;
- l'attestation de paiement des frais d'inscriptions et pédagogiques ;
- un RIB ;
- la copie d'un justificatif de logement sur le lieu de formation le cas échéant ;

- pour les candidat·e·s habitant le Morbihan, le dossier spécifique complété (à télécharger sur le site Internet du Conseil départemental du Morbihan) ;
- si nécessaire, tout justificatif permettant l'examen et la prise en compte d'une situation sociale particulière.

#### **Pour « Desk / enseignement » :**

- une lettre de motivation au métier d'enseignant·e bilingue ;
- une copie de votre diplôme de licence ou autre diplôme Bac +3, ou d'une attestation de l'Université certifiant du suivi d'une licence 3<sup>e</sup> année ou de votre diplôme le plus élevé (si supérieur à la licence) ;
- pour les enseignant·e·s monolingues, la copie de l'attestation de Congé de formation professionnelle (CFP) ou de mise en disponibilité accordés par l'employeur ;
- pour les candidat·e·s habitant le Finistère, la copie du dernier avis d'imposition ou de non-imposition (celui des parents le cas échéant) et une lettre de demande d'aide financière à l'attention de Madame la Présidente du Conseil départemental du Finistère.

#### **Pour « Desk / petite enfance » :**

- une lettre de motivation au métier bilingue de la petite enfance auquel vous vous destinez ;
- une copie de votre attestation d'obtention d'un concours permettant de travailler dans le secteur de la petite enfance (ATSEM...) ou de votre diplôme permettant de travailler dans le secteur de la petite enfance (CAP petite enfance, BEP carrières sanitaires et sociales, DPAP, DEEJE, agrément PMI...) ou de votre diplôme ouvrant le droit à intégrer une formation préparant à un métier de la petite enfance ou un descriptif des conditions qui vous permettent l'accès à l'un des métiers de ce secteur ou vous ouvrent le droit à entrer dans une formation préparant à un métier de la petite enfance.

La lettre d'intention, la fiche de renseignements « Desk » et la liste des éventuelles pièces supplémentaires sont disponibles en téléchargement sur le site Internet de la Région Bretagne [www.bretagne.bzh/desk.enseignement](http://www.bretagne.bzh/desk.enseignement) ou [www.bretagne.bzh/desk.petite.enfance](http://www.bretagne.bzh/desk.petite.enfance), ou sur le site de l'Office public de la langue bretonne [www.brezhoneg.bzh](http://www.brezhoneg.bzh).

### **DÉPÔT DU DOSSIER**

Les dossiers « Desk » sont à adresser via votre centre de formation à :

Madame la Présidente de l'Office public de la langue bretonne  
32 bis rue des Martyrs – 29270 Carhaix-Plouguer

Les dates limites de dépôt des dossiers « Desk » sont :

- le 30 septembre pour la formation longue de septembre à mars ;
- le 31 janvier pour la formation longue de janvier à juin ;
- le 31 mars pour les formations de trois mois de mars à juin ou juillet.

### **PROCÉDURE DE SÉLECTION DES CANDIDAT·E·S**

Les centres de formation concernés sont chargés d'adresser les dossiers de candidature à l'Office public de la langue bretonne qui procède à leur pré-instruction avant envoi à la Région et aux Départements le cas échéant. Les candidat·e·s seront sélectionné·e·s sur dossier. La commission « Desk » sélectionnera en priorité les dossiers affichant clarté et précision du projet professionnel en tenant compte des situations sociales particulières. La commission est souveraine dans la sélection des candidat·e·s retenu·e·s pour l'attribution de l'aide.



# SKOAZELL

## POUR QUI ?

**Vous êtes déjà brittophone et vous vous inscrivez en master enseignement bilingue : vous pouvez bénéficier de « Skoazell ».**

Cette aide s'adresse à toute personne :

- ayant une bonne maîtrise de la langue bretonne ;
- ayant une licence ou toute autre équivalence permettant de s'inscrire en master « enseignement bilingue » ;
- inscrite en master 1 ou en master 2 :

→ pour devenir enseignant-e du 1er degré :

- > ESPE de Bretagne – site de Saint-Brieuc – en master « MEEF Premier degré parcours Professorat des écoles bilingues » (pour la filière publique) ;
- > KELENN – Quimper – en master « Éducation et formation, enseignement bilingue immersif breton-français » (pour la filière Diwan) ;
- > ISFEC Bretagne – site de Brest – en master bilingue « Métiers de l'enseignement et de l'éducation » (pour la filière privée catholique).

→ pour devenir enseignant-e du 2nd degré, à l'ESPE de Bretagne :

- > Département de breton de l'Université Rennes 2 (sites de Saint-Brieuc et Rennes) – en master bivalent\* « MEEF Second degré parcours breton » ;
- > Département de celte de l'Université de Bretagne Occidentale (sites de Saint-Brieuc et Brest) – en master bivalent\* « MEEF Second degré parcours breton ».

\* seconde discipline : français, anglais, histoire et géographie, mathématiques.

## CONDITIONS DE RECEVABILITÉ

Il est possible de bénéficier de « Desk / enseignement » pendant l'année de formation au breton puis de « Skoazell » pendant les deux années de master enseignement bilingue.

L'aide au titre de « Skoazell » ne peut être cumulée avec un autre financement de la Région.

Il est exclu d'attribuer une place au titre de ce dispositif aux :

- personnes dont la demande de Congé de formation professionnelle (CFP) est accordée pour la durée de la formation concernée ;
- personnes en congé parental rémunéré ;
- personnes bénéficiaires d'une pension civile ou militaire de retraite ;



- personnes percevant un revenu mensuel supérieur ou égal au SMIC net durant la période de formation (de septembre à juin), hors pensions versées par les parents.

Le dossier «Skoazell» doit être complet et impérativement adressé avant les dates limites mentionnées ci-après afin qu'il puisse être traité par les services de la Région Bretagne.

**Tout dossier adressé après ces dates ne pourra être traité.**

## QUELLES MODALITÉS ?

### FINANCEMENT

Le montant de l'aide «Skoazell» est de 4 000 euros pour l'année de master 1 (année de passage du concours) et de 2 000 euros pour l'année de master 2 (sauf pour l'année de master 2 commençant en septembre 2016, pour laquelle l'aide sera de 2 250 €).

En cas de redoublement de la première année de master, le ou la bénéficiaire ne pourra recevoir la seconde partie de l'aide que lors de son année de master 2. L'aide ne sera pas accordée en cas de redoublement de l'année de master 2.

Pour l'année scolaire 2016-2017, le nombre d'aides accordées pour le soutien apporté en master 1 au titre du dispositif «Skoazell» ne pourra excéder 50.

### L'ENGAGEMENT DES BÉNÉFICIAIRES

En contrepartie de «Skoazell», vous vous engagez à :

- suivre la formation préparatoire à l'enseignement bilingue en totalité ;
- respecter l'obligation de présence aux formations attestée par l'établissement («Skoazell»

ne peut être accordé en cas de dispense d'assiduité) ;

- suivre au moins une semaine de stage intensif par immersion en langue bretonne pour chaque année aidée au titre de Skoazell ;
- vous présenter au concours auquel vous êtes inscrit-e, une seconde fois en cas d'échec ;
- enseigner pendant cinq ans dans une classe bilingue français-breton.

### MODALITÉ DE CONTRÔLE

En cas de rupture de son engagement, le ou la bénéficiaire de «Skoazell» devra rembourser l'aide allouée. Ces dispositions sont détaillées dans la convention d'engagement du ou de la bénéficiaire.

### CONSTITUTION DU DOSSIER

Le dossier de candidature comprendra :

- la lettre d'engagement bilingue dûment complétée et signée (à télécharger sur [www.bretagne.bzh/skoazell](http://www.bretagne.bzh/skoazell)) ;
- une lettre de motivation bilingue présentant votre projet professionnel et précisant le type d'enseignement bilingue vers lequel vous vous destinez ;
- un CV bilingue ;
- une copie du diplôme de licence ou autre diplôme Bac +3 ou d'une attestation de l'Université certifiant du suivi d'une licence 3<sup>e</sup> année ;
- une attestation d'inscription en master ;
- un RIB ;
- l'attestation d'inscription ou de présence à un stage intensif par immersion en langue bretonne.

## **DÉPÔT DU DOSSIER**

Les dossiers « Skoazell » sont à adresser à :  
Monsieur le Président du Conseil régional  
de Bretagne  
283 avenue du Général Patton  
CS 21101 – 35711 RENNES cedex 7

Les dates limites de dépôt des dossiers  
« Skoazell » sont :

- le lundi 20 juin 2016 pour la 1<sup>re</sup> session ;
- le lundi 22 août 2016 pour la 2<sup>de</sup> session.

## **PROCÉDURE DE SÉLECTION**

### **DES CANDIDAT·E·S**

Les candidat·e·s seront sélectionné·e·s par un jury. Un entretien en breton évaluera notamment leurs motivations et aptitudes linguistiques. Le jury portera une attention particulière au niveau de langue des candidat·e·s à l'écrit et à l'oral, à leur intérêt pour le métier d'enseignant·e, à leur(s) expérience(s) éventuelle(s) dans l'un des métiers de l'enseignement. Concernant le niveau de langue exigé, il est rappelé l'intérêt d'avoir suivi une licence de breton\*, en particulier pour les personnes s'orientant vers l'enseignement bilingue dans le second degré. Il est d'autre part très fortement conseillé de s'inscrire à l'avance au(x) stage(s) intensif(s) par immersion en langue bretonne et de se munir de l'attestation d'inscription ou de présence.

Après instruction des dossiers par les services, chaque candidat·e recevra de la Région une convocation à l'audition.

Deux sessions d'auditions ont lieu, fin juin et fin août 2016 au Conseil Régional de Bretagne.

Le jury est souverain dans la sélection des candidat·e·s retenu·e·s pour l'attribution de l'aide « Skoazell ». Après délibération lors de la seconde session d'auditions, il informe les services de la Région de la liste définitive des bénéficiaires. Les candidat·e·s retenu·e·s recevront alors une convention à signer.

\* Ce diplôme valide une partie des acquis nécessaires à l'enseignement de la/en langue bretonne.

## **POUR PLUS D'INFORMATIONS**

-----

### **Service des Langues de Bretagne**

Direction de l'éducation,  
des langues de Bretagne  
et du sport

#### **COURRIELS :**

**[desk-skoazell@bretagne.bzh](mailto:desk-skoazell@bretagne.bzh)**  
(pour les deux dispositifs)

**[desk@opab.bzh](mailto:desk@opab.bzh)**  
(pour « Desk »).





# Skoazell & Desk 2016 2017

Skoazelloù Rannvro  
Breizh evit dont da vezañ  
kelenner-ez divyezhek  
brezhoneg/galleg  
pe ober micherioù  
divyezhek war-dro  
ar vugaligoù



“**DESK**” ha “**SKOAZELL**” zo skoazelloù hiniennel evit ar re zo e soñj mont da gelennerien-ezed divyezhek galleg-brezhoneg pe da gelennerien-ezed war ar brezhoneg pe evit ar re a fell dezho ober ur vicher war-dro ar vugaligoù e brezhoneg.

Lakaet e vezont e pleustr e framm politikerezh yezh ar C’huzul-rannvro da gas ar brezhoneg war-raok.

## PESEURT PALIOÙ ?

- Stummañ un niver bras a dud barrek da gelenn brezhoneg hag e brezhoneg er skolioù pe da labourat e brezhoneg e bed ar vugaligoù, evit ma vo treuzkaset ar yezh a rumm da rumm.
- Pourveziñ trawalc’h a zanvez kelennerien-ezed da vont war ar postoù kelenn zo ezhomm anezho e tri hentad an deskadurezh divyezhek.

# DESK

## EVIT PIV ?

→ Fellout a ra deoc’h deskiñ brezhoneg pe gwellaat ho parregezh war ar yezh **evit dont da vezañ kelenner-ez divyezhek pe kelenner-ez war ar brezhoneg**: ho mad a c’hallit ober eus « **DESK / KELENN** ».

« Desk / kelenn » a vo grataet :

- d’ar gelennerien pe d’ar c’helennerized unyezhek o deus bet un ehan-stummañ digant o implijer evit mont da gelenner-ez divyezhek / da gelenner-ez war ar brezhoneg ;
- d’ar re o deus tapet un aotreegezh pe ul live kevatal all a ro ar gwir da lakaat e anv e stummadurioù prientiñ ar c’henstrivadegoù war an deskadurezh divyezhek, pe d’ar re o deus tapet un diplom uheloc’h a ro ar gwir da lakaat e anv er c’henstrivadegoù hag a fell dezho deskiñ brezhoneg a-raok kelenn ;
- d’ar gelennerien pe d’ar c’helennerized divyezhek a fell dezho heuliañ ur stummadur uhel e brezhoneg e-pad ouzhpenn 3 miz evit kreskiñ o barregezh war ar brezhoneg.

→ Fellout a ra deoc’h deskiñ brezhoneg pe gwellaat ho parregezh war ar yezh **evit ober micherioù divyezhek war-dro ar vugaligoù** (eiler-ez bugaligoù, gwazour-ez arbennik er skolioù-mamm, skoazeller-ez-m.v.amm, skoazeller-ez-kerent, kasour-ez bugaligoù, desaver-ez...): ho mad a c’hallit ober eus « **DESK / BUGALIGOÙ** ».

Soñjet eo bet ar skoazell-mañ evit :

- an implijidi unyezhek a labour e bed ar vugaligoù dija hag o deus bet un ehan-stummañ digant o implijer evit ober war-dro ar vugaligoù en div yezh ;
- an dud tapet ganto un diplom pe ur genstrivadeg a ro gwir dezho d’ober micherioù war-dro ar vugaligoù hag a fell dezho deskiñ brezhoneg a-raok klask labour ;
- an dud zo o klask ul labour all e framm ar stummañ dibaouez hag a zo e soñj deskiñ brezhoneg a-raok kregiñ gant ur stummadur da zeskiñ ur vicher war-dro ar vugaligoù.



Evit bezañ sikouret gant « Desk / bugaligoù » e rankit bezañ enskrivet evit ur stummadur brezhoneg d'an daoulamm pe ur stummadur emvarrekaat arbennik « bed ar vugaligoù » e brezhoneg (6 miz ha/pe 3 miz) en unan eus ar c'hreizennoù grataet meneget a-raok.

## **DIVIZOÙ DEGEMER**

Gallout a rit kontañ war « Desk / kelenn » e-pad ho ploavezh stummañ e brezhoneg ha war « Skoazell » e-pad an daou vloavezh e master deskadurezh divyezhek.

Ne c'hall ket « Desk » bezañ roet ma'z eus ur skoaziad all digant ar Rannvro, nemet unan evit paeañ plas ar staj evit ar re zilabour e vefe ha/pe unan evit goprañ ar stajidi, hervez an dezverkoù dilennadusted termenet e Kaierad an Diferadennoù teknikel dibar eus Programm Breizh Stummerezh 2015-2017 (goulenn digant ar Servij hentad perzhekaat : [spaq@bretagne.bzh](mailto:spaq@bretagne.bzh) / 02 99 27 14 70).

Evit bezañ sikouret gant « Desk / kelenn » e rankit bezañ enskrivet evit ur stummadur brezhoneg d'an daoulamm hag a bad 6 miz pe muioc'h en unan eus ar c'hreizennoù stummañ grataet-mañ :

- Kelenn (bloavezh rakstummañ);
  - Mervent;
  - Roudour;
  - Skol an Emsav;
  - Stumdi;
  - UCO (Gwengamp pe Aradon – DS);
- pe evit ur stummadur brezhoneg d'an daoulamm a bad 3 miz en unan eus ar c'hreizennoù stummañ grataet-mañ :
- Mervent;
  - Roudour;
  - Skol an Emsav;
  - Stumdi.

Talvit evezh, mar plij, ma vo klok ho teuliad « Desk » ha kaset dre ret a-raok an deiziadoù meneget amañ da-heul (gwelet « fiziout an teuliad »).

**Ne c'hallo ket an teuliadoù kaset goude an deiziadoù-mañ bezañ kemeret e kont.**

## PESEURT MODELEZHIOÙ ?

### ARC'HANTAOUÏÑ

« Desk » a zo ur stignad savet gant Rannvro Breizh ha Departamantoù Penn-ar-Bed hag ar Mor-Bihan. Gant Ofis publik ar brezhoneg e vez rakstudiet an teuliadoù.

Da 3 000 euro e sav sammad ar skoazell evit ar stummadurioù hir (6 miz). Reiñ a ra ar Rannvro an diforc'h zo etre ar sammad uhelañ (3 000 €) ha skoazell an Departamant m'emañ an degemerer-ez o chom. Ma n'eus skoaziad ebet gant an Departamant, ne'z aio ket skoaziad ar Rannvro en tu-hont da 2 500 euro.

Ar skoaziad a vez paeet e div wech pa vez roet ur skoazell a-gevret gant an Departamant hag ar Rannvro pe en ur wech pa ne vez roet nemet gant ar Rannvro.

Da 1 500 euro e sav ar skoazell evit ar stummadur uhel (3 miz).

An div skoazell a c'haller kaout war un dro ma reer ur staj 6 + 3 miz.

E 2016, an niver a skoazelloù roet ne c'hallo ket mont en tu-hont da :

- 65 evit ar stummadurioù « Desk / kelenn » 6 miz ;
- 26 evit ar stummadurioù « Desk / kelenn » 3 miz ;
- 21 evit ar stummadurioù « Desk / bugaligoù » 6 miz ;
- 9 evit ar stummadurioù « Desk / bugaligoù » 3 miz.

## ENGOUESTL AN DEGEMERER-EZ

En eskemm ouzh ar skoazell « Desk » e rankit gouestlañ tremen dre ret an arnodenn DBY (Diplom Barregezh war ar Yezh) e dibenn ho stummadur ha reiñ bec'h evit :

- dont da vezañ kelenner-ez brezhoneg pe kelenner-ez divyezhek en unan eus an tri hentad kelenn divyezhek pe dre soubidigezh, ma tegemerit « Desk / kelenn ». ar gelennerien pe ar c'helennerized unyezhek a zo engwiriet da vezañ kelenner-ez divyezhek da-heul o stummadur a rank gouestlañ ober o seizh gwellañ evit kelenn e-pad 5 bloaz d'an nebeutañ en ur c'hlas divyezhek galleg-brezhoneg ;
- labourat e brezhoneg war-dro ar vugaligoù, ma tegemerit « Desk / bugaligoù ».

### **MODELEZH KONTROLLAÑ**

Ma vez torret an emglev e ranko degemerer-ez « Desk » daskoriñ ar skoazell roet dezhañ i . Skrivet eo an diferadurioù en emglev engouestlañ an degemerer-ez.

## SEVEL AN TEULIAD

Ho teuliad enskrivañ a c'hoarvezo eus :

- ar fichenn ditouriñ leuniet ;
- al lizher mennadiñ sinet ;
- ho CV ;
- un eilad eus ho testeni enskrivañ en unan eus an ensavadurioù stummañ ;
- un testeni eus paeamant ar mizoù enskrivañ ha pedagogel ;
- un DAB ;
- un eilad eus un testeni lec'h bevañ war al lec'h stummañ diouzh an dro ;
- evit an emstriverien-ezed o chom er Mor-Bihan, an teuliad arbennik leuniet (da bellgargañ e lec'hienn Internet Kuzul-departamant ar Mor-Bihan) ;
- diouzh ret, kement testeni o reiñ an tu da studiañ ha da gemer e kont ur saviad sokial dibar.

### **Evit « Desk / kelenn » :**

- ul lizher emginnig da vont war ar vicher kelenner-ez divyezhek ;
- un eilad eus ho tiplom aotrageezh pe un diplom all bachelouriezh + 3 pe un testeni eus ar Skol-veur a broue maoc'h oc'h heuliañ un aotrageezh 3<sup>e</sup> bloavezh, pe ho tiplom uhelañ (mard eo uheloc'h eget an aotrageezh) ;
- evit ar gelennerien pe ar c'helennerized unyezhek, eilad testeni an Ehan Stummañ Micherel (ESM) pe al lakaat e-maez karg roet gant an implijer ;
- evit an emstriverien-ezed o chom e Penn-ar-Bed, un eilad eus ho kemenn tailhoù pe distailh diwezhañ (hini ar gerent diouzh an dro) hag ul lizher goulenn yalc'had da gas da Itron Prezidantez Kuzul-departamant Penn-ar-Bed.

### **Evit « Desk / bugaligoù » :**

- ul lizher emginnig evit ober ar vicher divyezhek war-dro ar vugaligoù emaoch e-sell d'ober ;
- un eilad eus ho testeni (Gwazour tiriadel arbennik ar skolioù-mamm...) pe eus ho tiplom evit gallout labourat e gennad ar vugaligoù (Testeni gouested vicherel bugaligoù, Breou studi vicherel micherioù yec'hedel ha sokial, Diplom micherel eiler-ez b.v.abigouriezh, Diplom Stad desaver-ez bugaligoù, gratadur gant Gwarez ar Mammoù hag ar Vugale...) pe eus ho tiplom a ro gwir da heuliañ ur stummadur da zeskiñ ur vicher war-dro ar vugaligoù pe un deskivadenn eus an divizoù a ro an tu deoc'h da vont war unan eus micherioù ar gennad pe ar gwir da gregiñ gant ur stummadur da zeskiñ ur vicher war-dro ar vugaligoù.

Al lizher mennadiñ, ar fichenn ditouriñ ha roll ar pezhioù stag evit « Desk », diouzh ma vez, a c'haller pellgargañ e lec'hienn Genrouedad Rannvro Breizh [www.bretagne.bzh/desk.enseignement](http://www.bretagne.bzh/desk.enseignement) pe [www.bretagne.bzh/desk.petite.enfance](http://www.bretagne.bzh/desk.petite.enfance) pe e lec'hienn Ofis publik ar brezhoneg [www.brezhoneg.bzh](http://www.brezhoneg.bzh).

## **FIZIOUT AN TEULIAD**

An teuliadoù « Desk » a zo da gas **dre hanterou-riezh ho kreizenn stummañ** da :  
Itron Prezidantez Ofis publik ar brezhoneg  
32 bis straed ar Verzherien  
29 270 Karaez-Plougêr

An termenoù diwezhañ evit kas teuliadoù « Desk » a zo bep bloaz :

- d'an 30 a viz Gwengolo evit ar stummadur dibaouez etre miz Gwengolo ha miz Meurzh ;
- d'an 31 a viz Genver evit ar stummadur dibaouez etre miz Genver ha miz Mezheven ;
- d'an 31 a viz Meurzh evit ar stummadurioù tri miz etre miz Meurzh ha miz Mezheven pe miz Gouere.

## **DOARE DIBAB AN**

### **EMSTRIVERIEN-EZED**

Ar c'hreizenoù-stummañ a zo karget da gas an teuliadoù emstrivañ da Ofis publik ar brezhoneg hag a rakstudio anezho a-raok o c'has d'ar Rannvro ha d'an Departamantoù diouzh an ezhomm.

Diouzh o zeuliad e vo dibabet an emstriverien-ezed. Gant bodad Desk e vo dibabet da gentañ an teuliadoù a zispleg en un doare sklaer ha resis ar raktres micherel, o terc'hel kont eus ar plegennoù sokial dibab. Ar bodad a ziviz a-benn fin ar gont evit a sell ouzh dibab an emstriverien-ezed a vo dalc'het evit reiñ ar sikour dezho.



# SKOAZELL

## EVIT PIV ?

**Brezhoneger-ez oc'h ha lakaet hoc'h eus hoc'h anv er master deskadurezh divyezhek dija : ho mad a c'hallit ober eus « Skoazell ».**

«Skoazell» a vo grataet d'an holl re :

- o deus ul live brezhoneg mat ;
- o deus tapet un aotregeezh pe ul live kevatal all a ro an tu da lakaat e anv er master « deskadurezh divyezhek » ;
- zo enskrivet e master 1 pe e master 2 :

→ **evit dont da vezañ kelenner-ez er 1añ derez :**

- > SUKED Breizh – e Sant-Brieg – e master « MEEF Kentañ derez treugad Kelenner-ez er skolioù divyezhek » (evit an hentad publik) ;
- > KELENN – Kemper – e master « Kelenn ha stummañ, deskadurezh divyezhek dre soubidigezh brezhoneg-galleg » (evit hentad Diwan) ;
- > EUSGEK Breizh – e Brest – e master divyezhek « Micherioù kelenn ha deskiñ » (evit an hentad prevez katolik).

→ **evit dont da vezañ kelenner-ez en 2l derez e SUKED Breizh :**

- > Kevrenn ar brezhoneg e Skol-veur Roazhon 2 (e Sant-Brieg ha Roazhon) – e master daoubennek\* « MEEF Eil derez treugad brezhoneg » ;
- > Kevrenn ar c'heltieg e Skol-veur Breizh-Izel (e Sant-Brieg ha Brest) – e master daoubennek\* « MEEF Eil derez treugad brezhoneg ».

\* eil danvez : galleg, saozneg, istor ha douaroniezh, matematikoù.

## DIVIZOÙ DEGEMER

Gallout a rit kontañ war « Desk / kelenn » e-pad ho ploavezh stummañ e brezhoneg ha war « Skoazell » e-pad an daou vloavezh e master deskadurezh divyezhek.

Ne c'hall ket « Skoazell » bezañ roet ma vez ur skoaziad all digant ar Rannvro.

Ne vo roet plas ebet er stignad-mañ d'an :

- dud o deus bet un Ehan Stummañ Micherel (ESM) a glot e bad gant pad ar stummadur e kont ;
- dud gant un ehan kerentel gopret ;
- dud gant ul leve retred trevourel pe vilourel ;
- dud o devez ur c'horvoder miziek brasoc'h pe kevatal d'ar SMIC rik e-pad mare ar stummadur (adalek Gwengolo betek Mezheven), hep kontañ al leveoù roet gant ar gerent.



Taolit evezh, mar plij, ma vo klok ho teuliad «Skoazell» ha kaset dre ret a-raok an deiziadoù meneget amañ da-heul evit ma vo graet war e dro gant servijoù Rannvro Breizh.

**Ne c'hallo ket an teuliadoù kaset goude an deiziadoù-mañ bezañ kemeret e kont.**

## PESEURT MODELEZHIOÙ ?

### ARC'HANTAOUÏÑ

Da 4 000 € e sav «Skoazell» evit ar bloaz master 1 (bloavezh tremen ar genstrivadeg) ha 2 000 € evit ar bloaz master 2 (nemet evit ar bloaz master 2 a grog e Gwengolo 2016 ma savo ar skoazell da 2 250 €).

Ma ne dremen ket an degemerer-ez en eil bloavezh master goude ar bloaz kentañ ne c'hello resev eil lodenn ar skoazell nemet e master 2. Ne vo ket roet ar skoaziad mar bez doublet ar bloavezh master 2.

Evit ar bloavezh skol 2016-2017, an niver a skoazelloù roet ne c'hallo ket mont en tu-hont da 50 evit ar re e master 1 a glasko bezañ sikouret gant «Skoazell».

### ENGOUESTL AN DEGEMERER-EZ

En eskemm ouzh «Skoazell» e rankit gouestlañ :

- heuliañ stummadur ar master betek penn ;
- doujañ d'ar reolenn vezañs er stummadurioù gant testeni an ensavadurioù stummañ (ne c'haller ket reiñ «Skoazell» d'ar studieren-ezed ne zeuont ket d'ar c'hentelioù) ;
- heuliañ d'an nebeutañ ur sizhunvezh stummadur brezhoneg d'an daoulamm dre soubidigezh evit pep bloavezh sikouret gant «Skoazell» ;
- lakaat hoc'h anv ha kemer perzh er genstrivadeg Kelennerien-ezed er Skolioù (KS) divyezhek pe ar genstrivadeg Kelennerien-ezed el Liseoù hag er Skolajoù (KLS) divyezhek, ha

tremen un eil gwech m'hoc'h eus c'hwitet ar wech kentañ ;

- kelenn e-pad 5 bloaz en ur c'hlas divyezhek galleg-brezhoneg.

### MODELEZH KONTROLLAÑ

Ma vez torret an emglev e ranko degemerer-ez «Skoazell» daskoriñ ar skoazell roet dezhañ-i. Skrivet eo an diferadurioù en emglev engouestlañ an degemerer-ez.

### SEVEL AN TEULIAD

An teuliad enskrivañ a c'hoarvezo eus :

- al lizher engouestlañ leuniet ha sinet en div yezh (da bellgargañ e [www.bretagne.bzh/skoazell](http://www.bretagne.bzh/skoazell)) ;
- ul lizher emginnig en div yezh ma teskrivet ho raktres micherel ha ma resisait war peseurt doare kelenn divyezhek hoc'h eus c'hoant da vont ;
- ur CV en div yezh ;
- un eilad eus diplom hoc'h aotreeghezh pe n'eus forzh peseurt diplom all bachelouriezh + 3 pe un testeni eus ar Skol-veur a brou emaoch oc'h heuliañ un aotreeghezh 3<sup>e</sup> bloavezh ;
- un testeni a brou hoc'h eus lakaet hoc'h anv e master ;
- un DAB ;
- un testeni a brou emaoch enskrivet pe ho peus kemeret perzh en ur staj brezhoneg d'an daoulamm dre soubidigezh.

## **FIZIOUT AN TEULIAD**

An teuliadoù «Skoazell» a zo da gas da :  
Aotrou Prezidant Kuzul-rannvro Breizh  
283 bali ar Jeneral Patton  
CS 21101 – 35711 ROAZHON cedex 7

An termen diwezhañ evit kas an  
teuliadoù «Skoazell» a vo :

- al Lun 20 a viz Mezheven 2016 evit  
an dalc'h 1<sup>añ</sup>;
- al Lun 22 a viz Eost 2016  
evit an 2<sup>l</sup>.

## **DOARE DIBAB AN EMSTRIVERIEN-EZED**

Gant ur bodad-barn e vo dibabet an emstriverien-ezed. Selaouet e vint e brezhoneg. O youl hag o barregezh war ar yezh a vo priziet dreist-holl. Ar bodad a daolo evezh ouzh al live yezh implijet gant an emstriverien-ezed dre skrid ha dre gomz, ouzh ar fed a raint ouzh ar vicher kelenner-ez, ouzh o skiant-prenet (gant ma vo) en unan eus micherioù ar c'helenn. Evit a sell ouzh al live yezh goulennet e vo lakaet da dremen da gentañ gant ar bodad-barn an emstriverien-ezed o devo tapet o Aotreegezh war ar brezhoneg\*, dreist-holl ar re a zo e soñj mont war-zu ar c'helenn divyezhek en eil derez. Aliet oc'h a-hend-all da lakaat hoc'h anv en a-raok e stajoù brezhoneg d'an daoulamm dre soubidigezh ha dont gant un testeni enskrivañ pe un testeni a brou hoc'h eus heuliet ar staj.

Goude ma vo bet studiet an teuliadoù gant ar servijoù e resevo pep emstriver-ezed ur bedadenn d'an dalc'h dre gomz digant ar Rannvro.

Daou zalc'h dre gomz a vo, e fin miz Mezheven hag e fin miz Eost 2016 e Kuzul-rannvro Breizh.

Souveren eo ar bodad-barn evit a sell ouzh dibab an emstriverien-ezed a vo miret da gaout harp «Skoazell». Goude kemer e ziviz da-geñver an eil dalc'h dre gomz e ro da c'houzout da servijoù ar Rannvro piv a ya da vat d'ober roll ar re a vo roet «Skoazell» dezho. Ur c'hendivizad da vezañ sinet a vo resevet d'ar poent-se gant an emstriverien-ezed bet miret.

\* Gant an diplom-se e vez gwirieketaet ul lodenn eus ar pezh a zo da c'houzout evit kelenn ar /e brezhoneg.

## **EVIT GOUZOUT HIROC'H**

---

### Servij Yezhoù Breizh

Renerezh an deskadurezh,  
yezhoù Breizh ha sport

#### POSTELOÙ :

desk-skoazell@bretagne.bzh  
(evit an daou stignad)

desk@opab.bzh  
(evit «Desk»).